



KANENN-VEUR AR POBLOU GWASKET


Kan Bale




A-bell ha c'houi'c'heus klevet En erc'heg glas divent ? Pe chas, pe dud skour-




jezet O lenva'hed an hent ? O, poblou kaez milliget, Pe dorfed hoch eus



graet ? Ha' veldomp ho pe karet Ho pro dreist holl er bed ? -Achanta breudeur



sklaved, Hor bec'h a vez ho pec'h ! Ra stourmimp holl a-gevret : Ho trec'h a vo hon



trec'h ! Ra stourmimp holl a-gevret : Ho trec'h a vo hon trec'h !

DISKAN

Achanta ! breudeur sklaved,
Hor bec'h a vez ho pec'h
Ra stourmimp holl a-gevret :
Ho trec'h a vo hon trec'h ! } *diou wech.*

Ac'hanta ! breudeur sklavet,
 Hor bec'h a vez ho pec'h
 Ra stourmimp holl a-gevret : } *diou wech,*
 Ho trec'h a vo hon trec'h !

1

A-bell, ha c'houi c'h eus klevet,
 En erc'heg c'hlas divent ?
 Pe chas pe dud skourjezet,
 O lenva hed an hent ?
 O poblou kaez milliget,
 Pe dorfed hoc'h eus graet ?
 Ha 'veldomp ho pe karet
 Ho pro dreist holl er bed ?
 Ac'hanta !...

2

O deut, ni 'n'eus ergerzet
 Hevelep hentou kriz,
 Eveldoc'h hon eus gwadet,
 Eveldoc'h ez omp skuiz.
 O deut, p'ho pezo stardet
 Ho skoaz yen ouz hor skoaz,
 Ho kwanded ouz hor gwanded,
 E tougimp skanv hor c'hroaz !
 Ac'hanta !...

3

Hon ene 'zo bet ariet
 Gand arar lemm ar reuz.
 Ha gwa neb en deus gwasket
 Ar valloz war hor gweuz !
 Ha gwa neb en deub saotret

Ar peoc'h doun war hon tal !
 Ha mab hol lagad gloazet
 Gant mez an daerou dall !
 Ac'hanta !...

4

Ma chom hor mistri bouzar,
 Ma pad an noz re hir,
 En islonk ruz ar c'hlae'har,
 E lugern, yen, an dir.
 O Dir, mar deo entanet
 Ar gounnar en hor c'hreiz,
 Ouz flammou beo da luc'hed,
 E lintro Tarz hon Deiz !
 Ac'hanta !...

5

P'eo bet hor c'horfou brevet
 A-dreuz d'ar vein, d'an drein,
 Hor goanag hon eus miret,
 Er bed-man faez ha brein.
 En dremmwel gwerc'h, hor frankiz,
 Dirazomp, 'luc'h' vel tan.
 Ha c'hoarz taer hor yaouankiz
 A skiltr en avel c'hlan !
 Ac'hanta !...

ROPARZ HEMON

Lennit « **BREIZ ATAÖ** », gazetenn ar wir Vretoned. Kasit hoc'h ano da *M. l'Administrateur de Breiz Atao, Boite Postale 14 - Guingamp*, hag e vo kaset d'ec'h eun niverenn evit netra.